

Au fol° 76 recto, seulement le titre :

76 recto)

Ar Bugel Koar.

—

[rien aux fol° 76 verso et 77 recto.]

77 verso)

Ar bugel Koar

Ma n'ije groet Landregeris
Senni Klos mad dor ho iliz,
N'voa Ket badeet er bugel Koar
Tal en oter eus golo al loar

Peyar fantan a levere (1)
Daz Orio Mesquen p'en Kave :
— Ma hinderw Kez, pelec'h out bet ?
De gat a ran Kastu meurbet.

— Bet on du man barz er ru vras
O prenan eur gwisk satin glas
O prenan eur gwisk passamant
Dam fenererik a zo Koant.

— Ma ouffes ar peiz a hon me
Birviken Satin na dougfe :
Kentoc'h defe r' pennad Korden
Wit he Krougan eus eur derwen.

78 verso)

Bet eo a Kat en ali fall,
ha groet a zo deü enn hanval ;
Groet a zo deü eur bugel Koar

(1). — D'abord : lavare ; les deux a corrigés en e (en surcharge).

Wit ho lemel diwoar an douar .

Otro Mesquen pa neus Klevet
Raktal d'ar ger zo distroet ;
— Roit , ma merc'h , ho alc'héou
Wit mezekaat er goël deodou .

— Alc'hoë ma prez a zo torret
Alc'hoë ma bahut 'zo kollet ,
Alc'hoëou derc'h me na rin ket ;
Ma zad , nemeus alc'hoë e bet .

Otro Mesgwen pa neus Klevet,
N'eun hach pennet eo Kroget,
Ar Kouff bahut neus digoret,
Er bugel Koar e neus Kavet .

— Ma merc'h Margot , dime leret,
Piou a neus bet ho Kelennet ?
D'ober er buguel miliget
Wit ma lemel diwar er bet .

(79 verso)

— Eur Korandon a Koat Yeodi
Nevoa roët er bugel di
ha roët e moa ma gir dean
Nije ma noz eured Kentan .

Teir goëz an de vije tomet,
Teir goëz an noz vije gromet,
Vije gromet gant Spillo bras
ho Kalon a Sante er c'hlav .

— Ma merc'h Margot dime leret,
Piou en deus an bet badeet ?
— Ma zad , eur Belegik iaouank
En neus bet groet er vadeïant .

Da hanter - noz , pe diwar dro ,
E badeet en ho hano ,
wit hanter kant Skoet arc'hant gwen
ha Kement all en aour melen .

(80 verso)

— Ma merc'h Margot, dime leret,
hano er re neus an dalhet?

ho mevel, ho matez vian
Paëron ha maeronez dean.

En bek Gindi tal er (1) mor glas,
war en drezjen Kichen er groas,
Kri vije er galon na welje,
Er Bennerez pa ha voëlje :

E voëlet penneroz Mesgwen
er fang a Kerzet dierc'hen
Eun hiviz soufr en he c'herc'hen
Er bugel Koar voar he barlen

(81 verso)

er boureo Krog en he c'hazel,
hi dierc'hen ha diskabel;
A hent da devi aneü,
hak hi re iaouank da dimeü.

An otro Mesgwen a wele ten,
Nen tenna er bleo deus e ben;
A voëlet e verc'hik o teri,
ha nevoa bugel nemerti.

[pas de trad. franç.]

(1). — D'abord: ar; e écrit en surcharge sur a. — Dans les deux couplets qui précèdent, les points au commencement des v. 3 et 4, existent ainsi dans le ms. Penguern.